

3269

# GUERZ

## VAR SUJET DISTRO UN DEN YAOUANQ PARTIET GANT AR GUENTA REQISITION

VAR TON : Va Flaneden zo caled.

Tostait oll, tud yaouanq, ha qemerit true  
Ouz ar blaneden bonner a bouez var va bue ;  
Deut da guemesq ho taelou assambles gant va re,  
Da zoulaji va foaniou, deut da voela varne.

Cetu deg vloas tremenet ma zòn bet contraignet  
D'abandoni va c'herent, va douç, va mignonet,  
Evit monet d'am brezel da zouguen an armo  
E faveur al liberté voa promettet d'am bro.

Abaueq qeit all amzer, n'alfen qet lavaret  
Pet combat ha pet poanniu a meus-me anduret  
Trit c'chant leo am separe eus va c'herent nessa,  
Ha na meus bet diouto qélou an distéra,

E creiz ar c'harnach bermde va buez exposet,  
Unan demeus va diou vrec'h enfin a meus collet,  
Hac evit oll recompanq e meus bet va c'honeje,  
Hep réco neppansion da veva em c'ontre.

Ch'hoas laouen o tilezel servich ar Republique.  
N'en deo qet deut va speret da gomprent er fatiq  
Eus an hent bir ha poannius am boa-me da ober  
Aroc guelet va zud qér hac éruout er guér.

Collet e meus ar gallout da rēi sicour d'am zad,  
Hac o tivoeret va brec'h, n'allin mui labourat.  
Bréma va zud am mago, pa meus me c'hoas ar chang  
M'o deus leva hac are'hant ebars an abundanc.

Cetu me dejà éru tostic demeus ar guér ;  
Gant ar joa ouz va güelet an oll a ray din cher,  
Va zad, va mam, va c'herent, breudeur ha c'hoarezet,  
Ha va mestrezic fidèle a vo oll ravisset.

Bonjour dec'h, ô ya c'ontre ! eurus en em gavàn  
Gallout c'hoas ho contempli, dont da vervel amàn.  
Va c'halon gant ar joa vrus em c'hireiz zo seziel  
O tostat demeus an ty el lec'h m'on bet ganet.

Mes, oc'h anreal enni e zon bet trubuilhet,  
Un den dianav dñm-me en deus din lavaret :  
Eruet fall oc'h amèn ; sortiit, va mignon,  
Ne m'a qet ar mestr er guér, n'ho po qet aluzon.

Souezet bras o velet n'anaveyen hinî  
Touez qenlies personnach a voa o ren an ty,  
E meus-me prest respontet : ententit va rèsor,  
Me n'en don qet deut emâ da glasq an aluzon.

Clasq a rân va c'herent qer er plaç m'on bet ganet ;  
Al lec'h-mâ a zo dezo, amâ òn bet maguet,  
Lavarit din, me o ped pelec'h en o chavîn :  
Ne zefol netra qen din evit va c'hontantin.

An den-mâ a zo follet, int commandet erial :  
N'en d'ê qet mab d'hor mestri-ni ; ret eb er c'hasseal  
Güelet ho pije neuze eur mevallyen  
O tiredec gant bizier d'am chasseal soudan.

O sortial gant glae'har ha beuzet em daelou  
Da glasq va zud elec'h all, pe clèvet o c'hélou.  
En hent e zòn bet scôet vel gant cun tol curun,  
Pa meus-me anaveet voa sollet hor fortun.

Soudan e meus rancontret va c'hoar ar yaouanq,  
Eur zac'hie staguet outi, o c'houlen e bara.  
O clasq compren ar maleur varnomp-ni digüezet,  
Va speret zo bet troublet, ha va c'halon manret,

O Doue oll-buissant ! roït din hoc'h assistane,  
Roït din an nerz da glèvet penos ho Providang  
En deveus bet permetet, evit va c'hastia,  
Ma zomp-ni bet reduiset er stat an horrupla !

Va c'hearie paour, me o ped, sou'ajit va mizer ;  
Hast bras a meus da glèvet qélou deus va zad qer,  
Hac eus a vamie tener e devens hor savet :  
Mervel a rân en defot o zere'hel ambrasset.

Siouas di, va breurie paour ! ne oufes qet compren  
Peguen bras eo hor maleur peguer bras o anqen ..  
Allas ! ouspen hor madou a renqomp diyoeret ;  
Hor c'herent carantezus zo bet deomp ravisset.

En despet d'al lezennou grët gant ar Republique,  
Hon tad voa chommet fidèle dan Ilis Catholique ;  
Rac-se gant an tirant e zeo bet condonet  
Da bignat var ar chaffot vit bezat dibennet.

Prestic goude, hor madou a zo bet confisqet,  
Hac ive, prestic goude, siouas ! int bet guerzet.  
Consumet gant ar chagrin deus qement a gollo,  
Hor mam a zo bet neuze scôet gant ar mao.

Cessit, va c'hoar, da barlant ; cessit d'an dezoli,  
Re a meus var an douar a dourmant hac anni,  
Er moment mac'h esperen commanç beva eu'us,  
En em gavàn, va Doue ! myoc'h-mui maleurus.

Goude beza servichet ar Bepublique in rat,  
E deus, d'am recompanci, guillotinet va zad,  
Laqet va mam da vervel dre an dizcspé,  
Ha güerzet va oll vadou ; n'em bo nemet mizer.  
Diouz an tourmantchou garo a stoarm ous va speret  
Pelec'h caout soulajamant, pelec'h cavet remed ?  
Ar plac'h e deus captivet a bel va zantfiant  
A zoulajo va hirvoud gant e chomzou charmant.

Varzu ty va mestrezic e zàn gant esperanç  
Caout en e fidelite remed eus va zoulfrang :  
Bonjour déc'h, va rouanez ; cetu me deut er vro :  
Ancouët eo va oll boanniou, mar am c'harit atao.

Me a zo Fanchic, ho mignen distro eus ar brezel  
Hac a zo en peb amzer chommet déc'h-hu fidèle.  
Demeus vo oll garantez ebars en hoc'h andret  
E meus brema esperauz beza recompaneet.

000-7490

Petra, paour qèz reuzcudic ! elasquit-n em c'hever ?  
 Biscoas ne meus ho quelet, na desirer ober ;  
 Biscoas ne meus ho caret, ma birviqen n'er gràn,  
 Ha cetu, em bér gomzou, ho setanç diveza.  
 Me zo un den maleurus, ne gafet qet e bar,  
 Mil guech miliguet an heur m'on deut var an douar !  
 Oil gouliou va c'halon zo néve digoret,  
 O veza bet rebütant gant va myua caret.  
 Va mestrez ouz va guelet couezet en paourente,  
 Nije e fromessaou, nije e c'harante  
 Esperanc va eurusted, alias ! zo tremenet  
 Evel ma ra un ure en nòs dre hor speret.  
 An exempl-mà, tud yaouang, a deu d'oe'h instrui  
 Peguen dister ar bed-mà, leun ingrati ;

Epàd ma zoc'h pinvidic, gant an oll oc'h care ;  
 Mes mar tro rod ar fortun, . . . adieu ar mignonet !  
 Petra ràn var an douar ? collet va man, va zad,  
 Va Mestrez ha va madou, va brec'h da labourad :  
 O vervel pe o veva er c'hood gant al loëned,  
 Rin guell eguet implori amà faus mignonet !  
 Er c'hoajou an tevella o tont d'en em guzat,  
 Maguel vin gant ya plac'h, hac eus va daoulagad  
 E tiredo an dae'ou da dree'hia ya zec'hed,  
 Betec ar moment eurus ma qüittai ar bed.  
 En despet d'an injustice a eprouvà hirio,  
 Me bedo a greiz calou evit boneur va brô :  
 O va Doue ! deurvezit renta dre ho puissanc,  
 Ar bonheur, al liberté d'an brô guèr eus a Franc.

## GUERZ AN ENE DAOUNET

Clevet pebes glac'har en deus an den collet,  
 Goudé joa an douar, corf hac enc daounet  
 Ous eur pligeadur ber, changet eur baradéz,  
 Captif gant Lucifer en ifern da james.

Gant Doue ez oon krouet evit e servicho,  
 Mac evit e garet ha gantan jousso :  
 Caret em eusenor, ha caret ar madou,  
 Oc'h heul ma flijadur oon coezet er poaniou.

Querent ha mignonet hac an oll friantaich  
 O deus ma decevet gant ho pompo volaich  
 Hint a so bet evidon ma oll occasion,  
 Birviqen lesqui ebars en dannation.

A den ma oll querent ha fals mignonet,  
 Evit ho drouc exempl ma fier miliguet,  
 Ha deoc'u, Mam ha tad evit ho drouc aly  
 Malloz Doue a ran dec'h hac evit ma hini.

O caret o moyen oe'h eus ma distroet  
 Dious douzéanç Doue, ous ma avanç er bed,  
 O clasq ma c'hasuel, goroet gant madou,  
 Ezom deut, tad, mam ho bugale oc'h traou

Hounes so eur caon hac eun disparti trist,  
 Quittaat roue an env hor Salver Jesus-Christ.  
 Dre ho scoliou nechant hac ho condui fall,  
 Oc'h eus dresset a hent d'ar poaniou infernal

Allas ! dious ma c'horf pa oon dispartiet,  
 Compagnugnet Satan o deus ma saisisset,  
 Presentet da Zoue assamblez n'a ferc'het,  
 Quement tra a songis, ha quement em boa gret.

Distrinquet oon bet prest a bresanç an Drindet  
 Gant queun bras lia glac'har d'an oeo collet,  
 Ezreel gant chaden torletour ha forban,  
 Ha taulet en ifern oar ma eil penn en tan.

Ho tremen e vélis er Lymb hon tad Adam,  
 Ha Noë an den just, ar fidèle Abraham,  
 Hennes oa ar c'henet demeuranç d'an Tadou,  
 Int so pignet er gloar, ha me couet er poaniou.

Pa voan couezet er Lymb eus an innocant,  
 O velet ma anquen ez int bet estammet ;  
 Adeo Jéoh ; bugale, hac adeo déch' annui ;  
 Me a ya en tourmant dianval d'oe'h hini.

Ebars er Purcatoar elec'h ma strazing an dent,  
 Ha gant cri a gant clem e c'houllont o c'herent ;  
 Eno int conselet gant o El-Gardien,  
 Ne deus na car na par d'ho temet a anquen.

Eno ema if ru, ama ar flem ar gron,  
 Ar strac vez er flammou muvevit trenou canon,  
 Ar meneyou a dan ous en em remui,  
 A bep corn adare ous en em assambli.

An ifern a rannas an tan bete ar gonelet,  
 Me hac eur million ous ma diguemeret,  
 Tan foelt ar bed all, na enaou, na gurun,  
 Ne dist quet tourn bras dar c'hurunou ma locun.

Me am boa crepet ferm ne voa quet nep diaoul,  
 Ne oa dressa tan voor dro ma ene paour,  
 Quen ma vetis quer po evet ar gloar en Ee  
 Drouc-irantet Satan o tourmant peb ene.

Santet em eus bet prest ar boan a bep pec'het  
 Ebars ar punç isela eus ar glorijsdet  
 Gant laëz, muntrou, blasphem poaset ebars en tan,  
 Gant speç a bee'het en cre ul lian.

Prest oon bet staguet gant ar re anvius,  
 Ha prest oon fagotet zant pillardet flerius,  
 Staguet ha distaguet ous peb pec'herrien all,  
 Dre grouez a yenen bras er plaçou tenval.

Pa edon e tourmant gant ar fals pinvidic,  
 E velas ma ene pelec'h voa guiridic,  
 Guelet er baradoz etouez ar Sænt ma flag,  
 Collet dre ma ratoes hep esperanc ha græc.

Se a doublas ma foan ha ma oll tourmanciou,  
 Ha ac e vliphemis Doie, roue an envou,  
 An ælez hac ar sænt, oll piñadur ar bed,  
 Querent ha mignonet gant e oon collet.

Ma ve evit dec mil blosas arretet va zermen,  
 Pe pa ve ar bed-ma remuet gant an Æm,  
 Goudé peb cant mil voas eur begadic bian,  
 Enni ve c'hoas esperanc bezza lammet a boan.

Hoguen pa songean cals en eñernite,  
 Ha ret bezza daonet etre pab o Doue,  
 Nennes so eun amzer hac a gresq ma anquen  
 Daounet da virviqen, ne allan lavaret quen